



22260 QUEMPEL - GUEZENNEC

Da Sant Vaodez

Selaouit ho pugale, sant Vaodez vinniget ;
Hon c'halon, hon c'harantez d'eoc'h a vezo bepred.

E kreiz nerz ho yaouankiz c'houi ' guitaas mamm ha tad
' Vit digas da Dregeriz tenzor ar « c'helou mat » .

Gant hon zadou 'c'h eus bevet hed kalz a vloaveziou ;
' Lies gante 'c'h eus gouelet ha dousaet o foaniou.

Pegen mat 'oa ho komzou ! gant pebez karantez
E roent o c'halonou d'eoc'h-hu, mignon Doue.

Pell 'zo da c'hloar an nenvou gant Doue oc'h galvet
Hag evit ho vertuio en deus ho kurunet.

Sant evurus, hon Patron, c'houi 'hentchas hon zadou ;
Grit d'imp kaout nerz-kalon da c'hounit an Nenvou.

Goulennit bennoz Doue d'an tadou, d'ar mammou,
Furnez vat d'ar vugale 'vit kerzou 'n ho roudou.

Eus a bep drouk hon miret, Patron karantezus ;
War ho parrouz astennit ho torn madelezus.

Binniget tiez, parkou : hag hon zud diwallet,
Pa grezo ar gwagennou war ar mor fuloret.

War ar gwagennou renet ha lestr ha merdead,
Ha d'ar porz o digaset d'ar c'houlz, divlamm dalc'hmata.

Ra vezo ho pugale bepred gwir gristenien ;
Neuze 'vo mat o buhez ha kaer o c'hurunenn.

Ha pa vimp er baradoz, o Sant Vaodez karet,
Ni 'gano d'eoc'h mil bennoz hag ho karo bepred.